

DISKAN AL LABOURER

War eun ton anavezet e galleg: « Tant qu'il y aura des étoiles »

I

Ni a zo potred, n'hor beuz ti ebet,
Beva reomp dre an entchou,
Hor c'hof zo goullo, ar galon glac'haret,
Mervel reomp gant naoun, gant riou,
Ni m' beuz hor pinvidigez memestra,
Avel an noz, amzer ar c'haera,
Deomp e zeo peb tra.

Diskan :

Pad ma vezo gwelet stered zindan bolz an Envou,
Vidomp e vezo eurusted a joa d'hor c'halonou.
Ni, paourkeaz labourerien vez laouen gant nentra,
Ar loar pa ro skerijen vez kaeroc'h vit pep tra,
Zindan an noz sklerijennet eüruz vezor bepred
Pad ma vezo gweled stered zindan bolz an Envou.

II

Zindan ar pontchou, hor gwele zo kalet,
N' dro dezo n'euz ket traou seiz,
Mez, ear vad a zo, c'heller lavaret,
Eno, ni n'em blij noz deiz
Gant son an avel vezer luskellet.
N'hor beuz ket tom, ni ra memestra,
Huovreou ouz ar c'haera.

(Diskan)

III

An amzer skrijus, warnomp digwezet
An dezo fin eun dervez,
C'hoaz vezor eüruz, c'hoaz vezo gwelet
En dud laouenedigez,
Pa glevor kleier ar peoc'h o sini,
Pebez plujadur, pebez dudi
Vezo vidomp ni.

(Diskan)

Diskan diweza :

Pegen laouen vo ar stered lugerni en envou,
C'hoant ho dezo deomp lavaret sec'hit mad ho taelou,
Grit, ma vezo difennet ar brezelliou spountuz,
Chomlt atao unanet ha bezit eüruz,
Diwallit da veza trec'het vel vezer awechou,
Bevi e peoc'h, en eürusted zindan bolz an Envou.

(Reproduction interdite.)

Francis MOAL.